

Kantikou evit an Eureujou.

EVIT EUN EURED

KAN : *Holl da Zoue.*

DISKAN :

*Santez Anna, Mamm gos Breiz-Izel,
Ha c'hwi Mari hor Mamm ive,
Sant Josef, holl briedoù santel,
Pedit evit an dud neve !*

1

Stouit gant doujans dirag Doue,
Tud iaouank a deu, laouen-bras,
Da c'houlen digant Mestr ar vue
Rei deoc'h e vennoz hag e c'hras.

2

Pa reaz Doue krouadurien
Goest d'e anaout ha d'e garet,
Hen deuz ive gret eur gourc'hemen
Da veza da viken miret :

3

« It, emezhan, hag hadit buez,
Dougit kalz frouez, en em skignit,
Var an douar bevit gant furnez,
Vel rouane varnhan renit. (1) »

4

Setu aze an eured kenta,
Ha gant Doue eo unanet
Hon tad Adam hag hor mamm Eva :
Gant den ne vint dizeureujet !

5

Ouz an eured Jesus a lavar
Ive d'e dro da bep kristen :

(1) Setu ho tron : varnhan pignit.

Den ne c'hall dizober na diskar
An urz savet gant Mestr an den.

6

Ar sakramant-ma dirag Doue,
Hervez sant Pol, 'zo meurbed-bras,
Pa die santelaat en o bue
Ha ren daou bried dre e c'hras.

7

Mari, ho kalloud a zo divent,
Goulennit 'ta digant Jesus,
E penn an elez hag an holl zent,
D'an dud neve grasou nerzus ;

8

Evit ma c'hellint er baradoz
Gant an holl zent kana laouen,
En enor deoc'h, Mamm (1), gras ha bennoz,
Ha da Zoue gloar da viken.

J.-Y. ●

AR BRIEDELEZ

Ton : *Epit beva gant levenez ;*

pe : *An hirvoudou ;*

pe etre daou rann : *Mari, hor Mamm garantezuz.*

1

Doue hen deuz krouet ar bed,
Ieod, gwez, pesket ha laboused,
Evel chatal ha loened gouez,
Hadet ha reizet peb buez ;
Ha goude an holl loened mut,
Doue hen deuz krouet an dud,
Ha douget kerkent al lezen
'Vije er bed padus ho gouen.

Pe (variante).

(1) Mamm, en hoc'h enor gras ha bennoz.

P'hen deuz Doue bet gret an den,
Ne grouas ket ar goaz hepken,
Med 'vit ma padfe e lignez
E krouas ive ar vaouez ;
Setu perag 'vit ar vue
Eo unanet dirag Doue
Ar c'hristen hag ar gristenez
A reseo ar briedelez.

2

Hor Zalver Jesus en Kana
A reas e varzud kenta
Da ziskouez hien deuz benniget.
Doue e-unan an etred ;
Ar briedelez gant Doue
A oe zoken savet goude
Da zakramant, evit rei gras
Da veva en urz gwelloc'h c'hoaz.

3

Diouz e galon p'hen deuz Jesus
Savet an Iliz gloriuz,
D'ar priedou hen deuz merket
Kalon oc'h kalon eo kerzet :
Kaout a reont er briedelez
Nerz da veva er garantez,
Ha da ober d'o bugale
Var hent ar baradoz bale.

4

Evit chomm er stad-se dinamm,
E tleont lezel tad ha mamm,
Ha beva an eil-egile
Unanet epad o bue ;
Unanet int evit ato,
Beteg ma vo unan maro :
Ne reont mui nemed unan
El levenez koulz hag er boan.

5

Bugale fur ha vertuzus
O c'henel dezo niverus,
A lako en env var o fenn
Ar binvidika kurunen ;

Hag astenn a raint evelse
 Er bed rouantelez Doué,
 Rag gloar da Zoue zo rentet
 Dre vuez kristen daou bried.

6

Er c'hontrol e loska ar feiz
 Dre ar vuez fall ha direiz
 A ren, siwaz ! en kalz brofou
 Re aliez ar priedjou.
 Doue a roas e valloz
 Zoken dindan al lezen goz,
 D'ar re a gouezas er pec'hed
 Etre priedjou difennet.

7

Evel ma kargas a c'hrasou
 Ha ma kurunas en envou
 Ar priedjou chast ha fidel
 A renas eur vuez santel.
 Rag ar briedelez kristen,
 Hervez sant Pol, 'zo eur skeuden
 Euz ar garantez peurbadus
 Zo 'tre an Iliz ha Jesus.

8

Priedjou kristen 'zo aze
 Dorn an eil en dorn egile,
 En em lakit dindan skoazel
 Ar Verchez hag he Mamm zantel !
 Gras deoc'h hepred euz da gerzet
 Dre ar sakramant kennerzet !
 Deoc'h er bed-ma bennoz Doue
 Ha digemer en env goude !

*Nevezet dioc'h ar c'hantik moulet d'ar 26 Genver 1922,
 d'an 3 C'houevrer 1931.*

J.-Y.

AOTRE DA VOULA :

Kemper, 17 a viz Du 1931.

P. JONCOUR,
 Viket-bras.

EVIT EUN EURED

Ton : *D'hor Mamm santez Anna...*

DISKAN :

*Da Jesus gant dudi
 Kanomp holl meuleudi,
 Ma vezo beniget
 Ganthan tud an eured !*

1

P'hen deuz Doue reizet
 Ar bed ganthan kronet,
 Varlerc'h hon tad Adam,
 'Krouaz Eva hor mamm.

2

'N eur lakaat da veva
 Hag Adam hag Eva,
 E reaz eur gourc'hemen
 Vit ma padfe o gouen :

3

« It, ha ra viot eleiz
 Em baradoz eun deiz,
 Dre-ze hadit buez,
 Ha dougit kalz (a) frouez. »
(Trég. et Corn.)

4

Setu er penn kenta
 Da Adam hag Eva
 Ar c'homzou lavaret :
 Gret ar c'henta eured !

5

Jesus ive d'e dro
 Lavar da dud e vro,
 Hen deuz Doue stardet
 Skoulm santel an eured :

6

An daou bried a zo
 Beteg deiz ar maro
 Staget gant eur chaden
 Ne vo torret gant den.

7

An eurejoun zo red
 Da nevezi ar bed,
 Hag ar briedelez
 Zo stad a zantelez.

8

Doue ro e vennoz,
 A roi ar baradoz,
 D'ar priedjou kristen
 A zalc'ho d'e lezen ;

9

Ha ne vanko netra
 'Vel en eured Kana,
(Ne vanko ket bara)
 Pa vo sentet en ti
 Ouz Jesus ha Mari.

10

Rag Mari ha Jesus
 A zo maledezus,
 Ha Doue 'ro skoazel
 D'ar priedjou santel.

11
 Kement a berlezen (*stereden*)
 Vo en o c'hurunien,
 Ma vezo a vugel
 En o zi da zeyel.
 (*O tiskenn er c'havel.*)

12
 Da c'hortoz, er vuez
 'Vo bras al levenez
 En kalon daou bried
 Ra o dever bepred.

13
 Enor d'ar gristenien
 Ha bennoz var o gouen,
 Pa 'z int holl da Zoue
 Hed-a-hed o bue !

14
 Jesus, roit ho pennoz,
 Ha roit ho paradoz,
 D'ar priedjou ho ped
 Gant feiz ama stouet !

15
 Ha c'hwi, Gwerc'hez dinamm,
 Dezo bezit eur vamm,
 C'hwi, ha santez Anna,
 Patronez ar vro-ma !

16
 Ra c'hellimp da viken
 Eun deiz en ho kichen
 Kana holl gant dudi
 Da Jesus memleudi !

3 *C'houeprer 1931.*

J.-Y.

AR BRIEDELEZ

Ton : *Evit beva gant levenez.*

1
 Abarz ma viot eureujet
 Dirag Jesus Salver ar bed,
 Ha prometi 'rit, priedjou,
 Miret bepred e lezennou ?
 Ia, ni a bromet kemeret
 An eil egile da bried,
 Hag heulia bepred lezennou
 Aviel Jesus hon Otrou.

2
 Unanet oc'h dirag Doue
 Dre lezen ar gwir garante
 Zo dleet etre priedjou
 Hervez komz Jesus hon Otrou :

Priedjou oc'h eta 'vit mad,
 Unanet en hano an Tad,
 Ar Mab hag ar Spered-Santel ;
 Setu lezenn an Aviel.

3
 Ar sakramant-man a zo bras,
 Eienen a nerz hag a c'hras
 D'ar goaz da garet e bried,
 Dezhi d'e zouja, d'e garet ;
 Rag ar briedelez kristen,
 Hervez sant Pól, zo eur skeuden
 Euz ar garantez peurbadus
 Zo 'tre an Iliz ha Jesus.

4
 Evel gwechall el lezen goz,
 Doue bepred 'ro e vennoz
 D'ar merc'hed 'zo evel Sara,
 Evel Rachel ha Rebecca,
 Fidel, fur ha karantezus,
 Skoueriou a feiz hag a vertuz,
 A zav ervad o bugale
 Hag a heul lezennou Doue.

5
 Ha c'hwi, goazed 'zo da viken
 Unanet d'eur vaouez kristen,
 Diwallit ouz pep tra direiz,
 Dalc'hit d'ar furnez ha d'ar feiz,
 Mirit bepred lezen Doue
 Ha pourveit dezhan ele :
 Gant gras Doue hag e vennoz,
 Velse 'kerzfot d'ar baradoz.

6

Gwerc'hez Vari, Mamm da Zoue
A zo ker braz ho karante,
Dirazoc'h hoc'h euz daou vugel
'N em laka dindan ho skoazel,
Grit m'o devezo hrr vuez
Bennoz Doue var o lignez,
Ma kavint ar gwir eurusted
En karante Doue bepred !

7

Dorn an eil en dorn egile
C'hwi wel e man ho pugale ;
Krogit en dorn all, o Gwerc'hez,
Rag c'hwi zo leun a vadelez ;
Harpet varnhoc'h ha var Jesus,
O buez a vezo eurus,
Ha gant Jesus, en ho kichen,
E vezint eurus da viken.

AOTRE DA VOULA :

Kemper, 17 a viz Du 1931.

P. JONCOUR,

Vikel - bras.

